

KANAOUEN

Savet evid Gouel an Eosterien, en Montroulez, ar Sul 6 viz Here 1907

TON : *Mar mije bet eun tam paper given.*

I

En Montroulez, hirio an deiz (*bis*)
Ema Pardon " *Iaouankiz Breiz* " (*bis*)
Diredet a zo tud e-leiz
Da enori Bro o c'havel;
Da enori Bro o c'havel
An douar goz a Vreiz-Izel!

II

En peb parrez deuz ar c'hontre (*bis*)
Vid Breiz zo ama karante (*bis*)
En Sant-Martin, en Sant-Vaze,
En Sant-Malani ha Plouïan;
En Sant-Malani ha Plouïan
Sant-Seo, Sant-Eutrop, ha Garlan.

III

Me ho salud, tud a galon (*bis*)
Fleuren Iaouankiz ar c'hanton (*bis*)
A ra enor d'ar vro breton
Hag a zalc'h uhel ho panniel;
Hag a zalc'h uhel ho panniel
En despet da iud an avel!

IV

En despet d'an avel gwalorn (*bis*)
Ni chomo hepred dorn ouz dorn (*bis*)
Ha ni welo, deuz a beb korn
'Tud e-leiz o tond d'an arme;
'Tud e-leiz o tond d'an arme
'Vid difenn gwiriou ar c'hontre.

V

Evid difenn ar Brezonek (*bis*)
Ken enorus hag ar Gallek (*bis*)
Ar bihana 'vo kalonek,
Hag an di-terra vo nerzuz;
An disterra a vo nerzuz
Rag argila a ve mezuz.

VI

Kemend Breton a zo d'emp kar (*bis*)
Kemend Bretonez zo d'emp c'hoar (*bis*)
Ebarz ar vro-ma omp holl par,
Dre 'n zikour 'n eil egile;
Dre 'n em zikour 'n eil egile
Breiz vo glorius heb dale!

VII

Ganeomp eo bet hadet an ed (*bis*)
En parkeier ar Vretoned (*bis*)
Ganeomp e vo ive eostet
Hag ar greun mad e-leiz hon zi;
Hag ar greun mad e-leiz hon zi
A vago c'hoaz meur a remzi.

VIII

Ma c'hanaouen 'rog echui (*bis*)
Chom a ra d'in da zoueti (*bis*)
Iec'hed, plijadur, ha dudi
Da gemend zo en azistanz;
Da gemend zo en azistanz,
Me lavar : Bevet Breiz ha Franz!

TALDIR JAFFRENOU.